

KANTIK SANT KOLOMBAN

Patron Kernevel.



Diskan :

Sant Kolomban, hor patron karet,
Dalc'hit feiz krenv en hor spered :
Hag en hor c'halon gwir garantez,
Evit Doue hag ar Werc'hez.

I

En Irland, er bempet kantved,
Eur bugel souezus a c'han
A zo abaoe ken brudet,
Dre an hano a Golomban.

II

Spered lemm ha gened dispar,
Pep tra 'deus 'vit plijout d'ar bed :
Mes e zell uheloc'h a bar,
Da Zoue eo : korf ha spered.

III

E Bangor, en eur manati
Renet gant an abad Komgall :
O studia 'vel o pedi,
Ez eo skouer ar venec'h all.

IV

Klevet 'ra eur vouez e c'hervel,
Da bellaat ous e di karet :
Ha Kolomban atao fidel,
Da Vro-C'hall kerkent a zired.

V

Er Bourgogn, ar Roue Gontran,
Hen digemer gant karantez ;
Laouen zoken e ro d'ezan
Douarou bras goloet a wez.

VI

Ar manac'h hag e vignoned,
Ar c'hoajou-ze a labouras ;
Hag eno evel ermited,
Pell er binijen a vevas.

VII

Doue ha ne zilez morse,
Ar re o deus fizianz ennan ;
Gant boued burzudus a vage,
Menec'h an « tad mat » Kolomban.

VIII

Brud e zantelez 'ia ken pell
Ma kresk e ziskibien bemdez :
Mar deo red evito sevel,
E Lukseuil, eur gouent nevez.

IX

Kolomban choazet 'vit abad,
O zalc'h war roudou ar zent koz ;
O boaz da yun, da labourat,
Da veuli Doue deiz ha noz.

X

Ar Sant n'eus ket desket krena :
Evel Yan Vadezour gwechall,
En e balez, rebec'h a ra
D'eur roue (1) lik e vuez fall.

XI

E ali n'eo ket silaouet,
E rebec'h a zo re c'houero,
Dre urz ar prins eo chadennet,
Ha kaset er meaz euz ar vro.

XII

E « Naoned » e kemer ar mor
Mes eun avel spountus a sav,
Hag ar vag torret he heor,
Endro d'an douar en em gav.

XIII

Doue 'vir outan da dec'hel :
E c'hervel 'ra d'eul labour all,
Ha 'n eur brezeg an Aviel,
Ar Sant war droad a dreuz Bro-C'hall.

XIV

Ne zell eus na poan na skuisder,
Tremen 'ra dreist ar meneiou (2),
Pa glev mouez dous e Zalver,
O c'houlenn gantan eneou.

XV

Mont 'ra beteg an Itali
Ha gant aotre roue ar vro
E ra sevel eur manati,
E-kichen Milan « e Bobbio ».

XVI

Tost d'e gouent en eul lec'h gouez,
E tremen e vloaz diweza :
Ha dirak skeuden ar Werc'hez,
E ra e beden hep skuiza.

XVII

Eun devez Doue a zeuas
Da gutuill e vleunen garet,
Gant evez, he dougen reas
D'ar baradoz gant an Eled.

XVIII

O sant patron, hed hor buez,
Grit ouzomp kristenien nerzus !
Hag hep aon rak pep gwaperez,
Ni a heuillo lezen Jezus.

XIX

Goude beza e Kernevel,
Ho pedet bemdez ha bemnoz ;
Ni a ielo, gant ho skoazel,
D'ho meuli oll d'ar baradoz.

(1) Roue yaouank ar Bourgogn, Thierry.
(2) Alpes.